


## KANTIK LOTHEY - LANDREMEL



Diskan :

They ha Fiacr. sent coz ar barrez,  
 Scuilhit varnomp puill ho pennoz,  
 'Vit ma vezo santel hor buhez,  
 Ma z'aimp holl d'ar baradoz.

1

Eur c'hantved zo. da Landremel  
 E teu sant They da glask gouzor,  
 Ha sant Fiacr, en e chapel,  
 D'e vignon ker a ra digor.

2

D'an daou ermit, d'an daou batron  
 Eun iliz kaër 'zo bet savet :  
 D'eo, peb-unan, en e galon,  
 Eun tron kaëroc'h hen deus lidet.

3

O daou breman, They ha Fiacr,  
 Eus ar Bester, eus ar Menez  
 A boagn d'ober eun douar sacr,  
 Eul liorz leun a levenez.

4

They ha Fiacr, e kreis hor bro  
 A zalc'h ar feiz en-he sklerder,  
 Ken soun, ken stard hag an dero  
 Ha dounoc'h-doun hed an amzer.

Var o skouer, dre o fedenn  
 Ar bokedou a zivoano.  
 Lili. ha roz, violetenn  
 Fleur a bep liou, a bep hano.

5

Dour o feunteun ouz peb klenved,  
 Remm ha gouli, a ro pare :  
 Ganthan raktal kaouad ar pec'hed  
 E vez treac'hed, e peb mare.

6

They ha Fiacr a oar sikour  
 Nep a zired evit goulenn  
 Bennos an nenv var al labour  
 Ha nerz kalon kreis an anken.

7

Kaër eo Lothey, kaër Landremel :  
 Brao eo beva en o maeziou...  
 Petra ra se p'eo red mervel ?  
 Kaëroc'h eo c'hoaz bro an nenvou...

8

Diñdan skoazel sent ar barrez  
 Holl tud Lothey, 'vel o zud coz,  
 Pa zigouezo fin o buhez  
 A nijo prim d'ar baradoz.

Imprimatur :

Quimper, le 10 Août 1946.

A. Moënnier, v. g.